




**kenvreuriez  
AR BREZONEG**

.....

1. Gouelioù ar Werhez a-hed ar bloaz.....34/138
2. Ar gomunion d'ar re glañv.....52bis
3. Goude ar maro - Pedennoù evid an arvest.....53/157
4. Wardro ar re varo.....61/165

0000000000000000000000000000000000000000000000000000000

|                                      |              |
|--------------------------------------|--------------|
| Kaierou Kenvreurezh ar Brezoneg..... | 20lur(5niv.) |
| KOMZ DOUE EN OVERENN - Levr T.....   | 30lur        |
| KOMZ DOUE EN OVERENN - Levr B.....   | 20lur        |
| KOMZ DOUE EN OVERENN - Levr C.....   | 20lur        |
| Ar briedelezh.....                   | 8lur         |
| An nouenn.....                       | 8lur         |
| LEVR AN OVERENN(embannadur nevez)    |              |

Kemper d'ar 26 a viz gouere 1974  
Visant Fave, eskob-skoazeller

## Evid an overennou-radio

Kalz parrezioù o-deus bet dija overennou brezoneg skignet dre radio; war well ez a atao an overennou-se a-vloaz-da-vloaz. Setu amañ koulskoude eun nebeud alioù.

Taoler evez mad emaez o lida eun overenn skignet dre radio; ar zelaouerien a zo niverusoh, kalz niverusoh eged ar re a zo en iliz; red eo delher kont anezo.

Da genta, evid ar brezoneg implijet: eur brezoneg êz da gompren d'an darn-vuia euz ar zelaouerien, eun doare "brezoneg eeun". N'eo ket stank ar re o-deus studiet o yez ha gerioù re "uhel" a yafe dreist o fenn. Ar pal da dizoud eo kelenn ha da genta beza intentet. Arabad eo avad koueza en eul lastez trefodaj, ne blij ket d'an dud e vefe mastaret ar brezoneg er gador hag anaoud a reont kalz muich a herioù eged na implijont etrezo. An dra-ze a zo ken gwir all evid an oll yezou. Eur brezoneg saouruz ha beo; ha goude ma vefe gantañ eun tammig blaz ar horn-bro n'eo ket fallch; re a vefe re.

Ha neuze distaga mad ha fraez, mond difonr/ganti, heb lonka an hanter euz ar gerioù, o verka mad an taol-mouez. Ne vez komzet er radio evel ma vefed o konta kaoz etre daou. Micher awalh eo kaozeal er radio; deski neuze 'ta !

Evid ar menozioù displeget, soñjal ivez er zelaouerien, Evito oll eo emaez o kaozeal. Lakom, da skouer, evid ar "bedenn evid ezommou an oll". Skei uhellch ha frankch eged ar pezh a zo o prederia ar barrezioniz, hag ar zelaouerien neuze? Ar re-mañ ivez a dle beza er gont hag a rank klevet gand ar pedennou eun hekleo euz ar vro a-bez, euz an iliz a-bez. Ma 'z eus alioù da rei d'ar barrezioniz, ne vezint embannet nemed pa vo displeget ar radio diouz an iliz.

Mad e vefe kaoud eun doare "disklerier", hag a gomzfe netra nemed evid ar zelaouerien ha ne vefe ket klevet gand ar re a zo en iliz. Dezañ, araog ma tigor an overenn, lavared eur ger bennag: e peseurt iliz emaez... piou a zo gand an overenn... ma 'z eus eul laz-kana... etc... eur gerig evid digeri, ar pedennou, al lenhadennou, eun diverra euz ar brezegenn, e galleg, awechou marteze. Ne vo ket klevet gand ar re a zo en iliz.

Pla's ar han - Gouzoud a reer n'hell ket ar radio gouzañv e vefe, e mare ebet, sioul ha mud peb tra. Beza dilu eta o tremen euz eul lodenn d'eben. Awechou e klevet kan war gan, kantik war gantik, ken na 'z a skuiz an den, e ziskouarn o voutinellad. Re a zo re, evid ar han evel evid ar peur-rest. Perag neuze ne vefe ket pennadou gand an ograou, gand ma vo an ograouer maill war e vicher. Soñjal ez eus o selaoù tud ampart war ar zonêrêz. Ouz red eur bladenn(disk).

N'eo ket red evel-just kana netra nemed kantikou anavezet gand an oll zelaouerien; estrêged an dra-ze emaez ar re-mañ o hortoz: kanennou ar barrez, ar horn-bro... Mad eo ivez kaoud kantikou nevez; atao war-raog!

An overenn-radio a rank koulskoude chom eun overenn-parrez, evel ma vez kanet beb sul, ha n'eo ket eun abadenn gana; eun overenn-parrez e gwirionez, bet pre-paret gwelloc'h evel-just, hag a ray lañs d'eur barreziad-tud e-keñver al lidêrêz hag e keñver al lod a dle kmer an oll en c'visou. Lakaad ar muia posubl a dud er gont evid dibaba ar hanennou hag evid pourchas ar han. Evel-se e vo getlet boaza an dud ouz kantikou nevez.

Ar parrezioù o defe c'hoant kaoud overennou-radio: Pask, Pantekost, Hanter-Eost, skriva da Job Seite, skol an aod -Gwiseni.

Kenvreuriez ar Brezoneg

Overennou-radio bet roet a-hed ar bloaz:

Gouel an Ollzent : Louaneg (Aodou an Hanternoz)

Nedeleg : Morbhan

Pask : Gwinevez

Pantekost ; Bubry (Morbhan)

Hanter-Eost : Plougerne

Trede lodenn

G O U E L I O U ar W E R H E Z a-hed ar bloaz

I

Santez Mari, Mamm Doue

deiz kenta a viz genver

Kan an digor : Salve Sancta Parens

Antivonenn ar Gomunion : Heb.13/8

Jezuz Krist a jom dijeñch:deh,hirio ha da viken.

(ar peur-rest:Levr-Overenn p. )

Al Iennadenriou : Levr T p.14-15

I bis

Gouel Jezuz kaset d'an Templ

d'an 2 a viz c'hwevrer

Epad hir amzer gouel ar Chandelour a oa Purifikasion ar Werhez Vari. Med bremañ, eo laket war roll ar gouelioù en enor d'or Zalver:or Zalver kaset d'an Templ.

Koulskoude e room amañ da houzoud ar pezh a zo red evid lida ar gouel-se, en aviz an dud a zeufe da glask.

Pep tra a vo kavet:

el levr-overenn.

al lennadennou : levr T p. 79

### Ar Werhez en em ziskouezet e Lourd

#### II a viz c'hwevrer

Kan an digor

Apo.21/2 Ps.44/2

Gweled a ris ar Gâr Zantel, ar Jeruzalem nevez,  
o tiskenn euz an Neñv, a gichen Doue,  
kempennet evel eur wreg nevez fichet evid he gwaz.

1. Euz va halon e tarz komzou dudiuz,  
d'ar Roue e kinnigan va hanenn.
2. Gloar d'an Tad, d'ar Mab  
ha d'ar Spered Santel.
3. Evel ma oa er peñn-kenta, bremañ ha da viken,  
a-hed ar hantvejou. AMEN !

An digemer:

Va breuder, ni a zo deuet da Lourd,  
evid pedi ar Werhez ha dreist-oll,  
evid mond d'ar skol ganti ha deski penaoz  
ren eur vuez santelloh war beb tachenn.

Araog kemer perz esakrifikis santel an overenn,  
goulennom pardon euz or pehejou.

Pedenn an digor:

Evid kempenn d'ho Mab eun demeurañs di<sup>n</sup>anezañ,  
eo plijet ganeoh, Aotrou Doue,  
e vefe konsevet heb pehed ar Werhez Vari.

Ni hag a zo deuet da Lourd  
da enori ar Werhez en em ziskouezet amañ;

ni ho ped a galon izel:  
grit deom kaoud yehed ar horv hag an ene.

Dre or Zalver Jezuz Krist, ho Mab hag on Aotrou,  
Doue beo ganeoh hag gand ar Spered Glan,  
a oll viskoaz da virviken.

AMEN !

Ni hag a zo deuet da enori ar Werhez,  
en em ziskouezet e Lourd.

Lennadenn genta:

Eur zin burzuduz a oe gwelet en neñv.

Lennadenn euz Levr an Diskuliadur gand Sant Yann. Apoc.11/19,12/1,10

11/19. En deiz-se, templ Doue a zigoras en neñv,  
hag e oe gwelet ennañ arh santel e emgleo.

12/1. Eur zin burzuduz a oe gwelet en neñv:  
eur vaduez gand an heol ouz he gwiska,  
al loar dindan he zreid,  
ha war he fenn eur gurunenn a zaouzeg steredenn.

10. Hag e klevis en neñv eur vouez kreñv hag a lavare:  
- Bremañ eo deuet da vad  
silvidigez, nerz ha rouantelez on Doue  
ha galloud meur e Grist.

Gradual Cant.2/12,13,14

Bleuniou a weler war an douar:  
deuet eo ar mare da gana  
ha klevet a reer mouez an durzunell en or bro.

Sav, va dousig, koan evel ma'z out,  
ha deus !  
Va zurzunellig, kluchet er garreg,  
kuzet en tornaod (tevenn)

ALLELUIA

1. Diskouez din da zremm,  
ro din da gleved da vouez;
2. rag c'hweg eo da vouez  
ha koant da zremm.
3. Gloar d'an Tad, d'ar Mab  
ha d'ar Spered Santel.
4. Evel er penn-kenta, bremañ ha da viken  
a-hed ar hantvejou. AMEN !
5. Bleuniou a weler war an douar,  
kleved a reer mouez an durzunell. (ar poz diweza-mañ en amzer-Fask)

(er-mēz euz an Amzer-Fask, e-leh an alleluia e vez lavaret kement-mañ:

Jud/15/10 -Cant 4/7)

Te eo gloar Jeruzalem, te eo levenez Israel,  
te eo enor or pobl.  
Kaer-murbed ez oh, o Mari  
hag an tech orijinel n'eus ket anezañ ennoh.  
Eüruz oh, Gwerhez Santel Mari  
ha din a beb meuleudi,  
c'hwi hag ho-peus flastret  
penn ar zarpant gand ho troad a werhez.

En lamzer-se, an êl Gabriel a oe kaset gand Doue  
d'eur gêr euz Bro-Halilea anvet Nazared,  
daved eur plah yaouank prometet d'eur paotr yaouank  
anvet Jozef, euz lignez David.  
Ar plah yaouank a oa Mari heb ano.

An êl a antreas en he zi hag a lavaras:

- Me ho salud, leun a hras,  
an Aotrou Doue a zo ganeoh;  
benniget oh dreist an oll gwragez.

O klevet kement-se e oe strafuillet ar plah yaouank;  
o klask gouzoud edo petra zinifie ar homzou-se.

An êl neuze dezi:

- N'ho-pet ket nehamant, Mari,  
deuet, mad oh d'an Aotrou Doue.  
Setu ma konsevoñ en ho kreiz  
ha ma lakoh er bed eur mab.  
Rei a reoh dezañ an ano a Jezuz.

Pedenn evid ezommu an oll:

Deuet om amañ da Lourd da enori ar Werhez Vari, Mamm da Zoue,  
d'en em lakaad dindan he skoazell.

Kasom warzu Doue, dre he daouarn, hor pedennou,  
evid ezommu braz an iliz hag ar Bed.

(intansionou: da zevel evel ma karer...levr-overenn p.41  
an niverenn 3 a hell beza lakeet an dra-mañ en e blas:

3. Evidom oll bodet amañ, evid or parrezioù,  
evid eskobti KEMPER a-bez )

da gloza:

Aotrou Doue, klevet hoh iliz o pedi ahanoh gand karantez,  
pa 'z oh c'hwil mammenn ar garantez;  
ha plijet ganeoh rei deom ar peñs a houlennom gand feiz.  
Dre Jezuz Krist, or Zalver. AMEN !

War ar provou:

Braz or fiziañs er Werhez Vari dibeh ha leun a hloar,  
e kinnigom deoh, Aotrou Doue,  
ar Sakrifik-mañ a veuleudi;  
ra bigno warzu ennoh, evel eur brovadenn digemeret mad  
ha ra zeuio deom diwarni  
yehed ar horv hag an ene.  
Dre or Zalver Jezuz Krist. AMEN !

Prefas ar Werhez p...3...Gand Gouel ar Werhez Vari, konsevet heb pehed..."

Ar gomunion ps.64/10

Deuet oh d'en em ziskouez war an douar,  
da zour an douar, d'e lakaad druz ha frouezuz;  
a binvidigeziou ho-peus karget ar béd.

1. Deoh eo dleet ar veuleudi, Aotrou Doue, e kêr Zion;  
ra vezoh meulet, c'hwi hag a zelaou ar bedenn.
2. Beteg ennoh e teu peb tra grouet gand e behejou;  
krefivoh egedom eo or pehejou, med c'hwi o dilam kuit.
3. C'hwi a harp ar menezioù gand ho nerz,  
c'hwi gourizet a halloud,  
c'hwi a dorr strak ar mor,  
strakadenn e darzioù.
4. Deuet oh da ober eun dro war an douar,  
da zoura an douar ha d'e garga a binvidigez.  
Steriou Doue a zo braz an dour enno,  
puill e tiwan an eost.
5. Bleuñia a ra ho madelez a-hed ar bloaz,  
war beurvanou ar goueleh, ruill a ra an doureier,  
Ar prajou a zo goloet a dropelloù,  
mantellet an traoniennou a winiz flour.
6. Gloar d'an Tad, d'ar Mab ha d'ar Spered Santel,  
evel d'ar penn-kenta, bremañ ha da viken,  
a-hed ar hantvejou. AMEN !

#### Goude ar gomunion

Torret ho-peus on naon, Salver Jezuz,  
o rei deom Bara ar Rcuantelez.  
Plijet ganeoh e teufe ar Werhez konsevet heb pehed,  
d'or skoazella gand he dorn a vamm,  
evid ma hellfem, gand he zikour,  
fizoud beteg or bro peurbaduz.

C'hwi hag a zo on Doue, Beo gand an Tad hag ar Spered Santel,  
a oll viskoaz da virviken. AMEN

### 3

#### Gouel Maria Veurz ( An Anonsiasion)

(25 a viz meurzh)

#### Kan an digor

Heb. 10/5-7

- Ar Hrist, en eur zond er béd, a lavar:
- Setu me, va Doue, dond a ran da ober ho polontez.

#### Antivonenn ar Gomunion

1z. 7/14

Setu ma konsevo ar Werhez ha ma lako eur mab er béd. Roet e vo  
dezañ an ano a Emmanuel, da lavared eo: Doue-ganeom.

#### Ar peur-rest:

Levr-Overenn p:

AL Iennadennoù : Levr T pajenn 129

Gouel ar Vizitasion (3I a viz mae)

( Mari o vond da weled Elizabed )

Kan an digor

Salm 65/16

Deuit da zelaou, olli dud a zoujañs Doue ma kontin deoh  
pegen kaer a draou e-neus greet evidon.

Pedenn an digor

Aotrou Doue olli-halloudeg,  
c'hwi ho-peus lakeet e spered ar Werhez Vari,  
a oa dougêréz euz ho Mab,  
ar zoñj da vond da weled hé hinitêréz Elizabed;  
Grit deom heulia ar pezh a houlenn diganeom ar Spered,  
evid ma hellim, ni ivez, ho meuli da viken.

Dre Jezuz Krist, ho Mab hag on Aotrou,  
Doue beo ganeoh ha gand ar Spered Glan,  
a-olli-viskoaz da virviken.

AMEN !

Lennadenn genta.

Roue Israel eo an Aotrou, en ho kreiz.

Lennadenn euz Levr ar Profed Sofoniaz

3/14-18

14. Savit kanou joaiuz, merh Sion !  
Taolit youhadennou a levenez, Israel !  
Bezit laouen, ha tridit a-greiz ho kalon, merh Jeruzalem.
15. Torret e-neus an Aotrou ar varnedigez a boueze warnoh,  
argaset e-neus hoh enebourien;  
roue Israel eo an Aotrou en ho kreiz,  
n'ho-po ket aon da gaoud mui ouz droug ebéd.
16. En deiz-se, e vo lavaret da Jeruzalem:  
- Bezit heb aon, kêr Zion! Na lezit ket ho taouarn da zinerza.
17. An Aotrou, ho Toue, a zo en ho kreiz, brezelour salver:  
levenez vraz a vo ennañ ablamour deoh,  
buez nevez a roio deoh en e garantez,
18. tridal a ray laouen evidoh, evel d'an devezicou gouel.

Lennadenn all da zibab

Roit ho pennoz d'ar re a wallgas ahanoh.

Lennadenn euz Lizer Sant Paol d'ar Romaned.

12/9-16b

9. Ra vo wirion ho karantez,  
tehit diouz an droug gand euz  
hag en em stagit ouz ar mad.
10. Evel m'en em gar breudeur,  
ho-pet an eil ouz egile eur garantez tener,  
pep hini o lakaad ar re all uhellou egetañ.

11. Bezit leun a breder heb diegi,  
e karantez birvidig ar Spered,  
e servij an Aotrou.
12. Gand al levenez a ro esperañs,  
mad da houzañv en drubuill,  
aketuz da bedi.
13. O vond war zikour ho predeur kristen en o ezommou,  
prest dalhmad da rei digemer en ho ti.
14. Roit ho pennoz d'ar re a wallgas ahanoh,  
roit ho pennoz ha n'eo ket ho malloz.
15. Bezit laouen gand ar re a zo laouen,  
gouelit gand ar re a ouel.
16. Bezit troet kement ha kement an eil ouz egile,  
na vezit ket troet gand ar grandeuriou,  
med, bezit douget d'ar pezh a zo izel.

Salm

lz. 12/2-3, 4bcd, 5-6

Braz eo , en ho kreiz, Sant Israel.

2. Doue eo va zilvidigez, ar fiziañs eo va lod,  
aon ebéd n'am-eus,
3. rag va nerz eo an Aotrou ha va meuleudi,  
eñ a zo bet va zilvidigez.
4. Kanit meuleudiou d'an Aotrou, youhit e ano;  
embannit e-touez ar poblou e oberou meur;  
digasit da zoñj eo braz e ano,  
kanit d'an Aotrou !
5. Rag, traou burzuduz e-neus greet,  
brudet dre ar béd a-béz.
6. Youhit ha tridit gand al levenez, tud kêr Zion,  
rag braz eo, en ho kreiz, Sant Israel.

Alleluia.

Luk. 1/45

Eüruz oh, Mari, rag m'ho-peus kredet  
e vefe sevenet penn-da-benn  
ar homzou lavaret deoh a-berz an Aotrou.

Aviel Jezuz Krist hervez Sant Lukaz.

1/39-56

39. En amzer-se, (goude beza bet ar helou digand an El)  
Mari 'zo eet en hent gand mall, warzu bro ar menezioù,  
d'eur gêr a Vro-Juda.
40. Antreal a ra e ti Zakari, ha saludi Elizabed.
41. Kerkent ha m'he-deus Elizabed klevet ar zalud gand Mari,  
e-neus tridet ar hrouadur en he hreiz,  
hag eo bet karget Elizabed euz ar Spered Santel.
42. Savet he-deus he mouez, da lavared a-bouez penn:  
- Benniget oh-c'hwil dreist an oll wragez,  
ha benniget eo frouez ho korv!
43. Hag a beleh e teu din kement-mañ:  
mamm va Aotrou o tond beteg-annon?
44. Rag, kerkent ha m'he-deus mouez ho salud skoet va diskouarn,  
e-neus ar hrouadur tridet em hreiz gand al levenez.
45. Eüruz an hini he deus bet feiz ha kredet e vo sevenet penn-da-benn  
ar homzou lavaret dezi a-berz an Aotrou Doue.

- 41/145 46. Ha Mari d'he zro a lavar:  
 - Meuleudi a gan va ene d'an Aotrou,  
 47. ha tridal a ra va spered gand Doue,va Zalver,  
 48. ablamour n'e-neus taollet e zellou war e zervicherezh distet.  
 Ya diwar vremen an oll dud,a rumm da rumm,  
 a lavaro ez on eüruz:  
 49. ken kaer traou e-neus greet evidon  
 an Hini 'zo braz e holloud,ha santel e ano,  
 50. hag a skuill e vadelez,a rumm da rumm war an dud a zouj anezañ.  
 51. Dispaka 'ra nerz e vreh:skuba an dud leun o halon a vrasoni,  
 52. diskar ar rouaned diwar o zron,hag uhellaad an dud izel;  
 53. ar re o-deus naon a garg a vadou,  
 ar re binvidig a gas kuit heb netra.  
 54. E skocazell a ro da Israel,e zervicher,  
 rag ne zizoñj ket e vadelez,  
 55. evel m'e-neus bet lavaret d'on tadou,  
 e keñver Abraham hag e liguez da viken.  
 56. Mari a zo chomet neuze gand Elizabet,war-dro tri miz,  
 ha goudeze eo eet en-dro d'ar gêr.

#### war ar provou

Plijet eo bet deoh,Aotrou,  
 ar garantez diskouezet da Elizabet  
 gand mamm ho Mab;  
 digemerit ivez gand madelez  
 ar Zakrifis a ginnigom deoh,evid or zilvidigez.  
 Dre Jezuz Krist,or Zalver. AMEN !

#### Antivonenn ar gomunion Luk. 1/46-47

Meuleudi a gan va ene d'an Aotrou  
 ha tridal a ra va spered gand Doue,va Zalver.

#### Goude ar gomunion

Ra zeuy hoh Iliz,Aotrou,da gana ho meuleudi,  
 evid kemend-all a vuzudou;  
 evel m'e-neus Yann-Vadezour tridet gand al levez  
 o kaoud anacudegez euz ar Hrist,  
 araog e hanedigez,  
 ra zeuy an Iliz da zigemer gand levez,  
 e Sakramant an Aoter,ar memez Krist,bepred beo,  
 Eñ hag a zo Doue,beo ganeoh ha gand ar Spered Glan,  
 a-oll- viskoaz da virviken. AMEN !

#### Gouel Itron Varia Menez Karmel (16 a viz gouere)

#### Kan an digor

Enor deoh,Mamm Zantel,lakeet ho-peus er bed,ar Roue a houarn an neñv hag  
 an douar,epad an amzeriou n'eus fin ebet dezo.

Pedenn an digor

Grit, Aotrou Doue, ma teuo war or zikour  
 pedenn ar Werhez Vari;  
 roit deom ar hras, dre he skoazell,  
 da vond beteg ar menez gwirion m'eo ar Hrist, on Aotrou.  
 Eñ hag a zo Doue, beo ganeoh ha gand ar Spered Glan,  
 a-oll-viskoaz da virviken.

Lennadenn genta

Zak. 2/10-13

gweled N° 11 pajenn

Salm

Luk. 1/46-55 pajenn:

Alleluia

Eüruz ar Werhez Vari,  
 bepred evezieg da viñed Komz Doue,  
 evid kompren  
 anezi en he halon.

Aviel Jezuz Krist hervez Sant Lukaz 2/15-19

gweled NO 6 pajenn:

Ar peur-rest

evel en overenn Salve Sancta Parens, pajenn: 2/106

6

Dedi Iliz-Veur an Itron Varia (5 a viz Eost)

Evel en overenn "Benedictus", pajenn 4/108

Pedenn an digor:

Ni ho péd, Aotrou,  
 pardonit o fehejou d'ho servicherien;  
 peogwir n'hellom ket plijoud deoh dre on oberoù,  
 ra vim salvet, dre zorn Mamm ho Mab.  
 Dre Jezuz Krist, ho Mab hag on Aotrou,  
 Doue beo ganeoh ha gand ar Spered Glan,  
 a-oll-viskoaz da virviken. AMEN!

Lennadenn genta

Gal. 4/ 4-7 pajenn 1/128

Salm

Ra vo benniget Ano an Aotrou,  
 bremañ ha da viken.

ar gwerzennou: pajenn: 14/118

pajenn: 32/136

7

Gouel Maria Hanter-Eost

( Ar Werhez douget d'an Neñv )

→ d'an derhent

Kan an digor

Lida a reom hirio ar burzudou kaer  
e-neus greet an Aotrou evid ar Werhez Vari;  
setu hi savet kalz uhellou eged an êlez.  
Lod a gemer hirio e gloar an Aotrou Krist  
ha rén a ra gantañ da viken.

Antivonenn ar Gomunion

Luk. 11/27.

Eüruz ar Werhez Vari,  
he-deus douget en he hreiz Mab an Doue Peurbadel.

Ar peur-rest

levr-Overenn pajenn:

lennadennoù : levr T pajenn 103 ha 104

→ da zeiz ar gouel

Kan an digor

Apoc. 12/1

Eur zin braz a zo paret en neñv:  
eur vaouez an heol ouz he gwiska hag al loar dindan he zreid,  
ha war he fenn eur gurunenn a zaouzeg steredenn.

pe

Tridom oll gand ar joa en Aotrou,  
o lida eur gouel en enor d'ar Werhez Vari;

An êlez a gan gand he savidigez d'an Neñv  
hag a veul Mab Doue

Antivonenn ar gomunion

Luk. 1/48-49

An oll, a-rumm-da-rumm a lavaro ez on eüruz;  
ken kaer traou e-neus greet evidon  
an Hini a zo braz e halloud.

Ar peur-rest

levr-overenn pajenn:

lennadennoù: levr T p. 105-106

Santez Mari, Rouanez (22 a viz east-)Kan an digor

salm 44/10

En tu dehou deoh en em zalh or Rouanez.

Pedenn an digor

Aotrou Doue,  
 c'hwi hag a zo fellet ganeoh  
 e vefe Mamm ho Mab, or Mamm hag or Rouanez;  
 grit deom, harpet gand he fedenn,  
 kaoud en Neñv ar hloar prometet d'ho pugale.

Dre Jezuz Krist, or Zalver, ho Mab hag on Aotrou,  
 Doue beo ganeoh ha gand ar Spered Glan,  
 a-oll-viskoaz da virviken.

AMEN!

Lennadenn genta

Iz. 9/2-7

pajenn : 17/121

Salm 112 /1-8

Meulet ra vezo Ano an Aotrou  
 bremañ ha da viken !

ar gwerzennoù: pajenn: 14/118

Aleluia

Luk. 1/16-38

Me ho salud, Mari, leun a hras,  
 an Aotrou Doue a zo ganeoh,  
 benniget oh dreist an oll gwraez.

Aviel Jezuz Krist hervez Sant Lukaz.

1/25-38

26. En amzer-se, e oa bet kaset an El Gabriel gand Doue d'eur gêr a Vro-Halilea anvet Nazared,
27. da gaoud eur plah yaouank dimezet,  
d'eun den anvet Jozef, euz lignez David,  
hag ano ar plah yaouank a oa Mari.
28. Erruet beteg enni, an êl a lavar:  
- Me ho salud, leun a hras,  
an Aotrou Doue zo ganeoh.
29. Hi a zav strafuill enni o klevet seurd komzou;  
soñjal a ra ganti heh-unan petra hell beza ar zalud-se.
30. An êl a lavar dezi:  
- Na gemerit ket aon, Mari,  
rag plijet oh da Zoue.
31. Setu emach o vond da gonsevi, hag e viot mamm d'eur mab,  
a roiot dezañ an ano a Jezuz.
32. Hennez a vo braz, hag anvet e vo Mab da Vestr an Neñv;  
an Aotrou Doue a roio dezañ kador-roue (TRON) David e dad;

- 45/149 33. roue e vo war lignez Jakob da viken,  
hag e rouantelez ne vo fin ebéd dezi.
34. Lav<sup>añ</sup>ed a ra Mari d'an êl:  
- Penaoz e hoarvezo kement-se ?  
Gwerhez on hag e choman.
35. Pespont a ran an êl dezi:  
- Ar Spered Santel a ziskennno warnoh  
ha galloud Mestr an Neñv a hololo ahanoh.  
Dre-ze, ar hrouadur a vo santel, ha Mab da Zoue e vo anvet.
36. Ha setu Elizabed, a zo kar deoh, he deus konsevet ive,  
dacust d'he bad, hag ar hwehyed miz eo eviti,  
goude ma lavarar ne vo morse mamm.
37. Rag Doue n'eus netra dreist e halloud.
38. Mari a lavar neuze:  
- Setu amañ servichérez an Aotrou:  
ra vo greet din evel m'ho-peus lavaret.  
Hag an êl a ya kuit diouti.

#### war ar provou

Gand ar zoñj euz ar Werhez Vari,  
e kinnigom deoh or provou, Aotrou,  
hag eh aspedom ahanoh:  
peogwir e-neus en em ginniget war ar groaz,  
e-giz eur glan a aberz (abertz=victime, hostie),  
ra zeuio Jezuz Krist, en e garantez evid an dud, d'or zikour.  
Eñ hag a zo Doue, beo ganeoh ha gand ar Spered Glan,  
a-oll-viskoaz da virviken. AMEN !

#### Prefas

pajenn:2/106

#### Kan ar gomunion

Luk.1/45

Eüruz oh, c'hwi hag ho-peus kredet  
e teufe da wir ar homzou lavaret deoh a-berz an Aotrou!

#### Goude ar gomunion

Maget gand ar zakramant euz an Neñv,  
ni a zeu, Aotrou, d'hoh aspedi:  
roñt d'ar re a gan, hirio, meuleudi d'ar Werhez Vari,  
kaoud plas ouz taol ar Rouantelez peurbaduz.  
Dre Jezuz Krist, or Zalver. AMEN !

#### Gouel Kalon Dinamm Mari

(d'ar zadorn euz an deirved sizun warlerh ar Pantekost)

#### Kan an digor

sa Im 12/6

Kanom meuleudi ha bennoz gand Mamm or Zalver:  
tridal a ra va halon ablamour d'ho silvidigez,  
eur hantik a zavin d'an Aotrou evid e vadoberou.

Aotrou Doue, c'hwi hag ho-peus kempennet,  
e kalon ar Werhez Gloriuz Vari,  
eun demeurâs din euz ar Spered Santel;  
grit deom, dre zikour he fedennou,  
dond da veza templ ho kloc'h.

Dre Jezuz Krist, or Zalver, ho Mab hag on Aotrou,  
Doue beo ganech ha gand ar Spered Glan,  
a-oll-viskoaz da virviken. AMEN !

Lennadenn genta

Tridal a ran gand al levenez en Aotrou.

Izaiaz 61/9-11 - pajenn: 18/122

Salm I Sam. 2/1-7

pajenn: 17/121

Alleluia.

Eüruz ar Werhez Vari,  
bepred evezleg da vired Komz Doue,  
evid kompren enni en he halon.

Aviel Jezuz Krist hervez Sant Lukaz.

2/41-51

pajenn: 31/135

War ar provou

En enor d'ar Werhez Vari, Mamm da Zoue,  
e kinnigom deoh, Aotrou, or provadenn hag or pedennou:  
grit ma vo plijuz deoh,  
ha ma teuint da odstaad ahanom ouzoh.

Dre Jezuz Krist, or Zalver.

AMEN !

Prefas

pajenn : 2/106

Antivonenn ar gomunion

Mari a vire an oll draou-ze en he spered  
hag a gompren enno en he halon.

Goude ar gomunion

Goude beza kemeret on lod en dasprenadur peurbaduz,  
e teuom d'ho pedi, Aotrou;  
peogwir eh enorom Mamm ho Mab,  
grit deom reseo a-fonn ho kras  
ha beza merket muioc'h gand frouez ar zilvidigez.

Dre Jezuz Krist, or Zalver.

AMEN !

5. Va zenna a reoh euz ar roued o-doa kuzet ouzin,  
rag c'hwil eo va divenn.
6. Etre ho taouarn, e lakan va spered,  
va dilivret az-peus, Aotrou, Doue gwirion.
15. Ennoh, Aotrou, e lakan va fiziañs,  
ha diskleria Iran: "C'hwil eo va Doue.
16. Etre ho taouarn ema va flanedenn.  
Va dilivrit euz va enebourien hag euz ar re am gwask.
20. Na braz eo ho madelez,  
a virit evid ar re a zcuj ahanoh,  
a roit d'ar re a glask repu ennoh,  
e keñver bugale an dud !

### Alleluia

Nag eüruz eo ar Werhez Vari !  
E-harz Kroaz or Zalver, heb gouzañv ar marc,  
he-deus meritet euz ar verzerenti ar hloar.

### Aviel

Yann 19/25-27

gweloud pajenn 33/137

pe Lukaz 2/27-35

gweloud pajenn 30/134

### War ar provou

Evid gloar hoh ano, Doue a vadelez,  
plijet ganeoh digemer or pedennoù hag or provadennoù,  
a ginnigom deoh, en enor d'ar Werhez Santel Mari;  
peogwir eo fellet ganeoh e teufe da veza or mamm,  
p'edo en he zav e-harz Kroaz Jezuz,

Eñ, on Doue beo, a oll viskoaz da virviken. AMEN

Prefas pajenn 2/106 " gand Gouel Seiz Glahar ar Werhez..."

### Antivonenn ar gomunion

I Pêr 4/13

M'ho-peus perz e poanioù ar Hrist  
tridit gand al levez:   
pa zeuy e hloar da bara,  
al levez-se ne voharz ebéd dezi.

### Goude ar gomunion

Goude beza resevet Sakramant an Dasprenadur peurbaduz,  
ni hoh asped, Aotrou, gand eur galon izel;  
grit ma hellim, ni hag a ra memor euz ar Werhez leun a druez,  
digas da vad ennom evid an Iliz,  
ar pez a jom c'hoaz da houzañv  
euz poanioù an Aotrou Krist.

Eñ, on Doue beo,  
a oll viskoaz da virviken. AMEN

Gouel Ginivelez ar Werhez Vari

( 8 a viz gwengolo)

Kan an digor

Lidom gand levenez Ginivelez ar Werhez Vari !  
Drezi eo deuet deom an heol a justis, an Aotrou Krist, on Doue.

Pedenn an digor

Aotrou Doue, leun a vadelez,  
skuillit war ho servicherien, teñzor ho krasou;  
peogwir eo bet digoret an hent d'or zilvidigez  
gand ar Werhez Vari pa zeuas da veza mamm,  
grit ma lako Gouel he Ginivelez  
ar peoh da greski en on touez.

Dre Jezuz Krist, or Zalver, ho Mab hag on Aotrou,  
Doue beo ganeoh ha gand ar Spered Glan  
a-oll-viskoaz da virviken. AMEN !

Lennadenn genta. Levr ar Furnez (Prov. 8/22-31

gweloud Levr T. p. 139

Lennadenn genta all. Mikeaz 5/1-4 pajenn 19/123Salm 12

8ab -gweloud Levr T p. 140

Alleluia hag Aviel gweloud Levr T p. 141war ar provou

Ra zeuy, Aotrou Doue, ho Mab Unganet,  
poulzet gand e garantez evid an dud, d'or zikour;  
peogwir n'e-neus ket e Hanedigez greet gaou  
ouz gwerhded e Vamm med he zakret,  
ra zeujo d'on dilivra euz or pehejou  
ha da renta plijuz deoh ar brovadenn-mañ.

Eñ hag a zo Doue, beo ganeoh ha gand ar Spered Glan,  
a-oll-viskoaz da virviken. AMEN !

Prefas p. 2/106Antivonenn ar Gomunion

Iz. 2/14 -Maz. 1/21 Setu ma lakay ar Werhez  
eur Mab er béd. Eñ eo a zalvo ar bobl euz he fehejou.

Goude ar gomunion

Dre ar gomunion-mañ, Aotrou Doue, e roit eun nerz nevez d'hoh iliz;  
grit dezi tridal gand al levenez, eüruz euz Ginivelez ar Werhez Vari,  
a lakeas da bara war ar béd an esperañs ha goulou-deiz ar Zilvidigez.

Dre Jezuz Krist, or Zalver.

AMEN!

## II

Gcuel Seiz Glahar ar Werhez Vari

( 15 a viz gwengolo)

Kan an digor

Luk. 2/34-35

An dén santel Simeon a lavaras d'ar Werhez Vari:

- Sellit, ho mab hag a zo aze,  
a vo eun abeg a goll pe a zilvidigez evid kalz tud  
en Israél. Bez 'e vo eur zin hag a zavo enebiez war e dro,  
ha c'hwil hoh-unan a vo treuzet ho kalon gand eur hleze.

Pedenn an digor

Fellet eo ganeoh, Aotrou Doue,  
e vefe roet da Vamm ho Mab, en he-zav e tal ar groaz,  
kemer perz en e boanico;  
roit ar hras d'hoh iliz, hi ivez  
da gemer perz e Pasion an Aotrou Krist,  
evid kaoud perz en e adsao da veo.

En hag a zo Doue, beo ganeoh ha gand ar Spered Glan,  
a-oll-viskoaz da virviken. AMEN

Lennadenn genta - Pasion or ZalverLennadenn euz al Lizer d'an Hebreed

5/7-9

7. Jezuz Krist, en deizioù ma veve er béd-mañ,  
e-neus savet e bedenn virvidig warzu e Dad,  
a oa en e halloud savetei anezañ euz ar maro;  
hopet e-neus outañ a vouez kreñv, an dour en e zaulagad,  
ha selaouet eo bet ablamour d'e zoujañs vraz ouz Doue.
8. Evitañ da veza Mab, e-neus desket diwar e boanico e-unan petra eo senti
9. hag, eur wech eet beteg penn, eo deuet da veza evid kement hini  
a zent outañ penn-kaoz d'ar zilvidigez peurbaduz.

Salm 30

2-3a, 3bc4, 5-6, 11-16, 20

En ho trugarez,  
roit din ar zilvidigez.

2. Ennoh, Aotrou, e kavan va repu;  
grit m'am-bo ket da gaoud méz;  
en ho justis, deuit d'am zikour.
- 3a. Troit ho skouarn warzu ennon;  
hastit buan va zalvi.
- 3bc. Bezit evidon eur roh da rei repu,
4. ur hastell ma vin ennañ e savete.  
Ablamour d'hoh ano, va heñchit ha va harpit.

I2

Gouel Itron Varia ar Rozera

(7 a viz here)

Overenn Salve Sancta Parens pajenn 2/106

Kan an Digor

Me ho salud,o leun a bras,  
ar zantella 'zo bet biskoaz,Mari !  
ar zantella 'zo bet biskoaz.

Ganeoh bepred ema Doue,  
c'hwil 'zo dezañ korv hag ene.

Benniget dreist an oll gwraez,  
c'hwil 'zo mamm hag atao gwerhez.

Benniget eo ivez Jezuz,  
frouez santel ho korv evuruz.

Santez Mari,mamm da Zoue,  
klevit pedenn ho pugale !

Pedit evidom,peherien,  
bremañ ha war eur on tremen.

Ma 'z aim ganeoh d'ar baradoz  
da veuli Doue deiz ha noz.

Pedenn an digor (gratiam tuam)

Ho kras santel,Aotrou,ho pedom da skuill en or halonou;  
ni hag on-neus bet kelou,dre zalud an El,  
euz Mister ho Mab en em hreet den,  
grit,dre bedennou ar Werhez Gloriuz Vari,  
ma vim heñchet,dre Bason ha Kroaz or Zalver,  
beteg Gloar an Adsao da Veo.

Dre Jezuz Krist,or Zalver,  
Doue beo ganeoh ha gand ar Spered Glan,  
a-oll-viskoaz da virviken. AMEN

Lennadenn genta

An diskibien a oa o pedi gand ar Werhez Vari

Lennadenn euz Levr Oberou an Ebestel

1/12-14

gweled uhellouh,pajenn 21/125

Salm

Luk. 1/46-47,48-49,50-51,52-53,54-55

gwerzenrou pajenn 12/116

Küruz oh, Gwerhez Vari,  
hoh-eus douget en ho kreiz  
Mab an Tad Peurbadel

Alleluia hag Aviel Sant Lukaz 1/26-38 pajenn 28/132

Prefas pajenn 2/106

War ar provou

Plijet ganeoh, Aotrou Doue, on lakaad e stad vad  
da ginñg Sakrifis an Overenn  
ha da gaoud ennom ar zoñj euz Buez, Pasion ha Gloar ho Mab,  
evid beza din euz e bromesaou.

Eñ, on Doue beo a oll viskoaz da virviken. AMEN

Antivonenn ar Gomunion Luk. 1/31

An êl Gabriel a lavaras da Vari:  
- Setu ma konsevoñ ha ma lakoh eur mab er béd;  
c'hwil'roio dezañ an ano a Jezuz.

Goude ar gomunion

Ho pedi a reom, Doue, on Aotrou:  
peogwir, en overenn, e tiskouezom or feiz  
en ho Mab savet a varo da veo,  
grit deom, o veza unanet gantañ en e Boaniou,  
gounid on lod ivez en o levez hag e hloar.

Eñ, on Doue beo, a oll viskoaz da virviken. AMEN

I3

Gouel ar Werhez konsevet dinamm

( 8 a viz kerzu )

Kan an digor

Iz. 61/10

Levezestlamm am-eus gand an Aotrou,  
ha tridal a ra va halon e va Doue.  
Laket e-neus warnon gwiskamant ar zilvidigez,  
ha mantell ar justis,  
par d'eur pried nevez gand e zeizenn,  
ha d'eur wreg nevez gand he bizou.

Kantik Gouel Maria Gerzu

- levr Kantikou, niverenn 93 - ur hantik kaer.

Nann, nann, biskoaz pehed  
n'hellas dua Mari.  
Biskoaz an droug-spered  
n'e-nevoe gwir warni.  
Ar zarpant bilimuz  
a flemm oll dud Adam,  
med dioutañ Jezuz  
e-neus miret e vamm.

Unan,unan hebken,  
 diwallet gand Doue,  
 evel eul lilienn  
 a zo gwenn-kann he sae;  
 da zant Joachim eo merh  
 ha da santez ANNA;  
 ken pur eo hag an erh  
 euz an neñv o koueza.

Ar peur-rest

Levr-overenn pajenn:

al lennadennou : gweled Levr T pajenn 121

Antivonenn ar gomunion

Eüruz oh, Gwerhez Santel Mari,  
 ha din a beb meuleudi,  
 rag ahancut eo savet an Heol a justis,  
 ar Hrist, on Doue, alleluia !

0 0 0

0 0

0

AR GOMUNION D'AR RE GLANV

- Peob . d'an ti-mañ ha da gement hini a zo o chom ennañ!

evid adori an Aotrou Doue er Zakramant.

- Salver Jezuz, c'hwil eo on nerz hag or skoazell.  
Ha, gand ho karantez divuzul, e teuit d'ober eur gwel d'or breur (D'OR HOAR),  
en-eus hoantaet reseo ahanch.  
Kennerzit anezañ (ANEZI) dre ho Komz ha dre ho Sakramant.  
Laouenait anezañ (ANEZI) o tont amañ.  
Ra gavo ennoh penn-kaoz kement pareañs,  
deuet da ziwall ha da zavetei or buez.  
C'hwil hag a ren gand an Tad hag ar Spered Santel, bremañ ha da virviken. Amen!

evid goulenn pardon

Dirag an Aotrou Doue, ni hag a gred ennañ, anzavom ez om peherien...

- Salver Jezuz, bet digaset war an douar evid or zilvidigez:  
Aotrou Doue, ho pet truez !
- Aotrou Krist, hag a zo deuet er bed-mañ, evid gelver ar beherion:  
Aotrou Krist, ho pet truez !
- C'hwil hag a zo bremañ e gloar an Tad, evid tenna warnom e vadelez:  
Aotrou Doue, ho pet truez !
- Plijet gand Doue oll-halloudeg kaoud trugarez ouzom,  
pardonit deom or pehejou,  
ha kas ahanom d'ar Vuez Peurbadel. AMEN !

komz Doue en Aviel

1. Aviel or Zalver Jezuz Krist, hervez Sant Yann...

Jezuz a lavaras d'e ebestel: An hini am haro a zalho mat d'am homzou. Va  
Zad e garo, ha dont e raim davetañ, hag ober a raim ennañ on lojeiz.

2. Aviel Jezuz Krist hervez Sant Yann (6/53-58)

Jezuz eta a lavar dezo: E gwirionez, e gwirionez, m'hen lavar deoh: ma ne ze-  
brit ket korv Mab an dén, ha ma n'evit ket e wad, n'ho-peus ket ar vuez en-  
noh. An neb a zebr va Horv hag a ev va Gwad, e-neus ar Vuez peurbaduz  
ha me 'zavo anezañ da veo d'an deiz diweza.  
Rag va Horv a zo gwir vagadur ha va Gwad gwir evaj.  
An neb a zebr va Horv hag a ev va Gwad a jom ennon ha me ennañ.  
Koulz ha m'e-neus va Zad, an Hini Beo, kaset ahanon,  
hag am-eus buez dre va Zad, an neb a zebr ahanon,  
hennez ive e-no buez drezon.  
Setu pehini eo ar Bara diskennet euz an Neñv: ar hontrol d'o tadou,  
o-deus bet ar mann da zebri hag a zo maro,  
an neb a zebr ar Bara-mañ a vevo da viken.

ar bater

- Kentellet gand gourhemenn or Zalver ha desket ma 'z om bet gantañ da bedi,  
e kredom lavaret:  
on Tad hag a zo en Neñv, hoh ano bezet santeleket, ho Rouantelez deuet deom,  
ho polontez bezet greet war an douar evel en Neñv. Roit deom, hirio, or bara  
pemdeziñ, pardonit deom or pehejou, evel ma pardonom d'ar re o-deus market  
ouzom, ha n'on lezit ket da goueza en tentadur, med on diwallit diouz an droug.
  - Euruz ar re zo pedet ouz Taol or Zalver !
  - Setu Oan Doue, an Hini a zillam pehed ar bed!
  - Va Doue, n'on ket din e teufeh beteg ennon, med lavarit eur ger hebken hag  
e vin pareet... KORV OR ZALVER ! Amen !
- Pedom! Tad Santel, Doue oll-halloudeg ha peurbadel, ni ho ped, da gaoud preder ouz  
or breur (HOAR). Evid mad e gorr (HE HORV) hag e ene (HE ENE), ra gavo ar pare  
da viken, o reseo Korv or Zalver Jezuz Krist, a ren ganeoh ha gand ar Spe-  
red Santel, bremañ ha da viken.

## G O U D E ar M A R O

Pedennou evid an arvest (noz-veill)

Evid-ar- wech eo bet troet ar Vretoned da bedi evid o zud eet da anaon. E-keid ha ma chome ar horv war ar varv-skaon en ti, ne ehane ket ar pedennou koulz lavared, pe lennadennou santel; kerent hag amezeien a yee d'an arvest pe d'an noz-veill lodenn pe lodenn euz an noz. Marteze e vez bremañ muioh a varvaillou gand an dud ha nebeutoh a bedennou.

Levriou kaer a zo hag a helle lenn, evel SKOL AR MARO MAD skrivet gand an Aotrou Morvan hag embanne vid ar wech kenta er bloavezh 1864. Eur skouerenn on-eus moulet evid ar c'hwehved gwech er bloavezh 1905.

Er bloavezh 1945, an Aotrou Yeun ar Go, noter e Gouezeg, e-noa embannet ar GRASOU PE AR PEDENNOU EVID AR RE VARO, ennañ 176 pajenn. Aze e kaver ar "grasou" evel ma vezent dibunet e parrez Skaer gand ar grasoer Saig Vernard euz Koadri. Goude-ze "grasou Gouezeg", dastumet gand Yeun ar Gô ha "grasou Gouenah diwar eur haier prestet gand an Aotrou Chaloni Perennes.

Er bloavezh 1953, Yeun ar Gô e-neus embannet PEDENNOU EVID EUN NOZ-VEILL GAND EUN DEN MARO, levrig a 40 pajenn, evel eun diverra euz an hini kenta. An hini kenta a oa bet moulet tri mil skouerenn anezañ, gwerzet dioustu gand ober pemm pe c'hweh miz; re gér e vefe bet e advoula.

Ar pedennou kaerra euz ar grasou-ze a embannin deiz pe zeiz, med dioustu e fell deom rei dech danvez eur veilladeg verr na hell n'eus forz piou lenn hag heulia. Savet ec bet evid ar peb brasa er bloavezh 1945.

o o o o o  
o o o  
o

## EUR VEILLADEG VERRÊZ DA HEULIA

### araog staga

Setu ni dastumet amañ, evid beilla gand N..., Doue e bardono (HE FARDONO) hag evid pedi. Goulaou a zo war elum; ar skeudenn int euz ior feiz: ni a gred n'eo ket echu buez an den tremenet, med cheñchet nemetken. Kroaz ha chapeled a zo gand an dén maro: diskouez a reont ar fiziañs e- neus bet en Aotrou Krist hag er Werhez benniget.

Chomom bremañ sioul ha devot dirag mister braz ar maro ha dirag kañv ha glahar ar gerent a zo amañ, evid ma vo on noz-veill eun akt a feiz hag eur bedenn.

Kemerom ior chapeled ha lavarom anezañ en eur zoñjal e komzou or Zalver ha kelennadurez an Iliz.

### I ar chapeled evid an dén tremenet.

#### dizenez kenta.

An hini a zo aze dirazom astennet war ar varv-skaon a zeuio adarre da veo, eun devez da zond. N'eo ket eur fin eo ar maro med eur gortoz; eun devez, ni en em gavo adarre asamblez.

" En amzer-ze e varvas Lazar e Betani; ha Jezuz a gare Marta hag he c'hoar Mari ha Lazar.

O veza n'edo Betani nemed eun tri hard leo bennag diouz Jeruzalem e oa deuet kalz Juzevien daved Marta ha Mari, evid o frealzi euz maro o breur. Pa glevas Marta edo Jezuz o tond, ez eas en arbenn dezañ e-keid ha ma chomas Mari er gêr.

Marta a lavaras da Jezuz:

- Aotrou, ma vefeh bet amañ, ne vefe ket marvet va breur! Med bremañ c'hoaz, her gouzoud a ran ervad, kement a c'houlennot digand Doue a vezo roet deoh.
- Da vreur a deui da veo endro, eme Jezuz dezi.
- Her gouzoud a ran, eme adarre Marta, dont a raio da veo endro pa deui beo an oll, da fin ar bed.

Ha Jezuz dezi:

- Me eo ar ar rezureksion hag ar vuez; an neb a gred ennon, ha goude ma vefe maro a vevo; hag an neb a vev hag a gred ennon ne varvo ket da vad; ha kredi a rit kement-se?
- Ya, Aotrou, eme Marta, me a gred ez oh ar Hrist, Mab an Doue beo hag a zo deuet er béd-mañ.

(Yann 11/Iè-27)

#### eil dizenez

Ni a bedo evid kerent ha mignoned an dén tremenet, evid ma teui Doue d'o frealzi ha d'o hannerza e-kreiz o glahar.

" O c'houzoud e oa digouezet evitañ ar mare da dremen euz ar béd-mañ daved e Dad, Jezuz hag e-noa karet e dud, e-keid ha m'edo ganto er béd, o haras beteg ar fin.

- Arabad dech beza trubuillet, emezañ; n'ho lezin ket emzivad. Va feoh a lez-an ganeoh, va feoh a roan dech. Ma garfeh ahanon e gwirionez, e vefe stad ennoh o veza ma 'z an daved va Zad, rag brasoh egedon eo va zad. Me a gaso dech ar Spered Santel, ar Frealzer; en a gelenno peb tra dech hag a zigaso soñj dech euz kement am-eus lavaret. En dristidigez emaoñ bremañ, med ho kalonou a drido gand al levenez hag ho levenez a vo digemmesk ha n'hell den he lemel diganeoh.

( Sant Yann )

teirvet dizenez

An dizenez-mañ a livirim en eur zoñjal er baradoz; eno emañ dija, fiziañs on-eus, an den a zo e gorr amañ hag a ouelom dezañ. An Aotrou Doue a zo mad dreist peb madelez. N'eo ket war or pebejou hebken eo e teu d'or barn, na war an nebeud a boan on-eus kemeret evid e zervija: ne zelaou nemed mouez e Drugarez.

- E ti va Zad, eme Jezuz, ez eus meur a zemeurañs; ma ne vefe ket bet gwir am-befe lavaret dech; rag mond a ran da bourchas dech eur plas. Pa vezin aet kuit ha pa 'm-bezo pourchaset dech eur plas, e tistroin hag e kemerin ahanon ganin, evid ma viot, c'hwi ivez, el leh m'emaon, er baradoz.

(Yann 14/1-4)

pedervet dizenez

Ni a gred er Purgator ha gouzoud a reom e vez dalhet eno aliez, dirag porz ar Baradoz, an eneou o-deus ezomm da veza dizaotret.

Ni a gred e hell or pedennou sikour anaon paour ar purgator. Evid an anaon-ze ha dreist-oll, evid ene an den tremenet emaoñ o veilla gantañ, hirio, emaoñ o vond da lavared an dizenez-mañ.

- " Bezit soñj, Aotrou, euz on tud aet da anaon, euz an dud a zo aet araozom euz ar béd-mañ, merk ar feiz warno, hag a gousk bremañ er peoh ganeoh.

Bezit soñj, Aotrou, eus an hini emaoñ en e gichen (EN HE HICHEN), o pedi hirio. D'an oll eneou-ze hag a zo maro e karantez or Zalver, roit al leh a freskadurez, a sklerijenn hag a beoh."

pempved dizenez

En on touez ez eus tud oajet, lod all yaouankoh; lod a zo yah, lod all, marteze taget gand kleñved pe gleñved. Da beb oad e varver ha n'eo ket diouz tro eo ez eer.

Or Zalver a lavar deom beza prest dalhmad. Evel Jezuz, lakeom on ene, en ayañs, etre daouarn an Aotrou Doue.

Sellom gand fiziañs ouz ar Werhez Vari aet evid atao e gloar an Neñvou ha goulennom diganti, epad an dizenez-mañ, beñla warnom, beza en or hichen d'an eur euz or maro ha digeri deom dor ar Baradoz.

0 0 0 0 0 0

0 0 0 0

0 0

0

## 2. selaoum Komzou Doue

(da lenn mar doa yaouank an dñn tremenet)

An hini a ouelom dezañ (DEZI), hirio a zo bet falhet abred.

Perag e teu Doue da skei evel-se, bugale, yaouankizou ! Or spered n'eo ket evid kompren. Selaoum Komzou Doue e Levr ar Furnez (4/7-15)

" Ah den just ha goude ma teufe da vervel yaouank a gavo an diskuit, Ar gozni santel n'eo ket an hini a zeu diwar hir vloaveziou; n'eo ket diwar an niver a vloaveziou eo he foueza.

Gouezet e-neus plijoud da Zoue ha Doue e-neus e garet; o veza m'edo o veva etouez ar beherien, e-neus Doue e gaset gantañ.

Sammet eo bet euz ar béd-mañ gand aon na vefe trevariet e spered pe na vefe kollet e ene gand ar fallagriez; an droug o trelli an daoulagad a zeu da vouga splannder ar mad, hag ar hoantegeziou dirollet a zeu da vreina an ene glan.

Deuet eo da veza santel e berr amzer: hir eo bet eta e vuhez. Plijoud a ree e ene d'an Aotrou, setu perag e-neus e lamet kuit buan euz ar béd a zizurz.

An dud a wel kement-se hag a jom dientent; ne zoñjont ket e teu a-berz Doue, d'an dud kavet mad gantañ, madelez ha trugarez, ha d'ar Zent skoazell.

Kement hini ahanom a glask beza eüruz, Jezuz e-neus desket deom hent ar gwir levezet ha ne vo fin ebed dezi. Selaoum gand doujañs e genteliou.

En amzer-se, o weled pegement a dud a oa, Jezuz a zo pignet ouz tor ar menez; mond a ra d'azeza, hag e ziskibien a dosta outañ.

Kregi a ra (STAGA 'RA) da gelenn anezo, o lavared kement-mañ:

- Eüruz ar re 'zo paour a galon, rag dezo eo Rouantelez an Neñvou.
- Eüruz ar re 'zo leun a zouster, rag an douar prometet a hounezint.
- Eüruz ar re o-deus da ouela, rag frealzet e vezint.
- Eüruz ar re o-deus naon ha sehed euz servij Doue, rag o gwalh a vo roet dezo.
- Eüruz ar re 'zo trugarezuz, rag d'o zro e kavint trugarez.
- Eüruz ar re 'zo glan a galon, rag int a welo Doue.

Eüruz ar re a labour evid ar peoh, rag anvet e vint bugale da Zoue.

Eüruz ar re o-deus da houzañv ablamour da zervij Doue, rag dezo eo rouantelez an Neñvou.

Eüruz oh-c'hwil, pa daolo an dud dismegañs warnoh, pa raint brezel deoh, pa lavarint e gaou beb seurd droug eneb deoh, ablamour din-me:

Bezit laouen ha tridit gand ar joa, rag digoll kaer ho-peus da gaoud en Neñvou.

(Maze 5/1-12)

E-kreiz ar glahar emañ, ha klask a reom abegou da ziazeza on esperañs. Selaoum komzou kaer an abostol Sant Paol en e Lizer da gristenien Tessalonig.

" Ne fell ket deom, breudeur, ho lezel en arvar diwarbenn ho re-varo, evid na vec'h ket gwasket gand ar glahar evel ar re all ha n'o-deus esperañs ebed.

Ma kredom eo Jezuz maro ha resusitet, kredom ivez e vo ar memez tra evid ar re a zo maro e karantez Jezuz: Doue o dastumo gantañ.

War gomzou an Aotrou eo e tiskleriom deoh kement-mañ; ni ar re vezo, hag a vezo c'hoaz war an douar da geñver donedigez or Zalver, ne dâim ket d'ar Baradoz araog ar re varo. Rag, d'ar mare merket, pa dregerno mouez an Arhêl, pa zono trompilh Doue, an Aotrou e-unan a ziskenno euz an Neñv hag ar re a vo maro e karantez an Aotrou Krist a resusito da genta.

Goude-ze, ni ar re vezo hag a vezo c'hoaz war an douar, ni a vezo sammet a-samblez ganto er goabrennou, en arbenn d'an Aotrou. Hag evel-se e vezim, evid atao, gand an Aotrou.

En em frealzit etaan eil egile gand ar homzou-ze.

( 1. Tess. 4/13-18 )

### 3. Skoueriou ar Zent

Ar zent a zo bet tud eveldom. Touellet int bet. Kouezet int bet, met gouezet o-deus mervel santel. Taolom evez ouz ar skouer a roont deom.

Sant Stefan lazet a daoliou mein.

O klevet Stefan o komz gand an Aotrou Krist, ez eas ar Yuzevien en egar... hag e skrignent o dent ouz Stefan.

Eñ avad, ar Spered Santel o leunia e galon hag e zaoulagad troet warzu an neñv, a welas gloar Doue ha Jezuz en e-zav en tu deou da Zoue.

- Ya, emezañ, gweled a ran an Neñvou digor ha Mab-an-Dén en e -zav, en tu deou da Zoue.

Huchal forz a rajont neuze ha stouva o diskouarn; hag oll war eun dro, sailla warnañ, stleja anezañ er maez euz kêr hag e laza a daoliou mein.

An testou o-devoa lakaet o dillad e harz treid eur paotr yaouank e ano Saoluz. E-keid ha m'edod ouz e veinata, e pede Stefan evelhenn:

- Aotrou Jezuz, resevit va ene!

Neuze e kouezas d'an daoulin hag e tistagas a vouez uhel:

- Aotrou, n'it ket da damall dezo ar pehed-se!

Ha war ar gomz-ze, e tremenas.

OBEROU 7/54-60

### Maro Sant Fransez Asiz

Heb ehan e klevet war e vuzellou, hag e-n dare da vervel, gwerzennou diweza ar hantik:

- Meuleudi deoh, Aotrou, evid or hoar ar maro!

D'ar zadorn, 3 a viz here, pa zigouezas ar medisin, Fransez hen digemeras, en eur houlenn outañ peur e tigorfe, pelloh, evitañ, porz ar vuez peurbaduz...

Diouz ar pardaez, e stags da gana gand eur vouez kreñv eston ha diskibi en Fransez, e-barz eul lochig paour, e-kreiz ar hoajou, e-kichen ar Porsionkul, a gleve o zad, e zaoulagad troet warzu an neñv, o kana da Zoue e esperañs.

Ha setu, e-keid ha m'edo Fransez o pedi evel-se, ma teuas ar gambrig vian, nebeud-ha-nebeud, da deñvalaad.

A-benn ar fin, a varvas e vouez hag eur sioulder a varo a renas er gambrig.

Muzellou Fransez a oa serret evid atao: en eur gana eo e tremenas euz ar béd-mañ d'ar Baradoz.

### Santez Tereza ar Mabig Jezuz

Roukounenni a rae en eun doare truezuz.

Savet e oa ar gwad d'he fenn hag he daouarn a oa aet dam-voug o liou; yen sklas a oa he zreid ha krenan. 'rae euz heh oll izili, evel eur bern deillou.

Ar houezenn a bizenne war he zal hag a ziruille war he bizaj.

Berroh, berra ez ae warni ken, na ranke krial awechou evid kaoud heh anal.

Da 6 eur, pa zonas an Angelus, e savas he daoulagad truezuz war skeudenn ar Werhez.

Da 7 eur hag eun dra bennag, ar Vamm Briolez, o kredi n'oa riskl ebed evid ar glañvourez, a lavaras d'ar zeurezed en em denna kuit.

Huanadi a reas:

- Mamm Briolez, emezi, daoust ha n'eo ket deuet an termen? Ha n'eo ket deuet an eur euz ar maro evidon?

- Ya, va merh, deuet eo ar mare, med marteze e plij gand Doue astenn eun tammig ho tremenvan...

Hag hi adarre gand nerz-kalon:

- Mad ! Deom! O, ne garfen ket berraad va foaniou !

Hag en eur zelled ouz ar groaz:

- O! E'gared a ran...Va Doue !... ho kared a ran !

Goude beza distaget ar homzou-ze, e kouezas, en eun taol, war adreñv; he fenn stouet war an tu deou. Kredi a raem oa echu hag ar Vamm Briolez a lakeas sini ar hloh gand prez, evid gervel an oll zeurezed .

Amzer devoe da zond ha da zaoulina endro d'ar gwele hag e weljont tremenvan diweza ar zantez beuzet e Doue.

Dremm Santez Tereza he-devoa kavet endro liou al lili evel p'edo e-kreiz he yehed, he daoulagad troet warzu an neh, leun a sklerijenn; aez lenn enno eul levezeg heb-par. Trei ha d'strei a rae he fenn .

Raktal goude ar mare dudiuz-se hag a badas amzer eur gredo, e serras he daoulagad hag e laoskas he huanadenn ziweza. Seiz eur ugent e oa pe wardro."

NOVISSIMA VERBA

### Ar Pab YANN XXIII

Ar Pab santel-se a zo bet karet dre ar héd a-bez.

Petra 'zoñje euz ar maro ?

Er bloavezh 1950, d'ar mare ma oa kannad ar Pab, e Paris, e skrive kement-mañ er "JOURNAL DE L'AME":

" Pa vezer deg vloaz ha tri-ugent, ne vez nemeur da gonta war an amzer da zond.

Arabad din eta ober huñvreou goull, med dond da voaza euz ar zoñj e tosta bemdez ar maro; n'eo ket avad gand spont, an dra-ze ne ra nemed dinerza an dén, med gand fiziañs, ar pezh a ro nerz-kalon da véva, da labourad, da renta servij.

Pell 'zo em-eus divizet ober evel-se: gortoz ar maro heb enkrez, beza laouen gand ar mouzhoarz a die beza mouz c'hoarz diweza va ene pa zono eviti an eur da guitaad ar béd-mañ.

N'eo ket e vefe mad lakaad ar gont war an dra-ze aliez, eun torr-penn e vefe evid ar re all, med soñjal bepred ennañ, rag boaza euz ar finveziou diweza a zo tra vad ha talvouduz evid gwaska an ourgoull, ren ar vuez gand furnez e peb keñver ha chom dibreder.

Evid ar pezh a zell ouz va feadra, e lakin kemm tra pe dra em destamant. Paour on, a-drugarez Doue ha paour e fell din mervel.

Daoust hag heb dale eo e teuo an Aotrou d'am gervel ? Prest on. Eur goullenn hebken ouz Doue: dond d'am herhed er mare mad.

Ha lezel a ray c'hoaz ganin eun nebeud bloaveziou, kalz marteze ? Bennez a lavarin dezañ; med e bedi a rin da nonpas va lezel war an douar ma teuan da veza didalvez evid an Iliz Santel hag eur zamm evid ar re all. Koulskoude, neuze, zoken, ra vo greet bolontez an Aotrou Doue, netra mui." (pajenn 423-427)

+ + + + +

Deuet eo da veza arheskob Veniz, e skrive, peavr bloaz warleh, en e destamant spirituel:

" An dud am-eus kavet war va hent a zo bet mad evidon, me an dister a zo ahanon, hag eüruz on bet war an douar. War-nez mond dirag Doue e teu soñj din anezo oll, hini hag hini, ar re a zo eet em raog d'ar béd all hag ar re a jomo war va lerrh. Goullenn a ran diganto pedi evidon.

Da vare ar himlad, pe kentoh ar henavo, e lavaran hoaz eur wech all d'an oll petra e-neus bet ar muia a briz em buez: Jezuz Krist benniget, e Iliz Santel, e Aviel, hag en e Aviel, dreist-oll ar bedenn: "On Tad hag a zo en Neñv.", hervez spe-red ha kalon Jezuz..., ar wirionez hag ar vadelez c'houeg hag hegarad, mad da rei ha d'en em rei, mad da houzañv, ar vadelez ha n'hell netra beza treh dezi hag a zo treh da beb tra.

Va bugale, va breudeur, Kenavo...

(pajenn 429-431)

#### 4. EUn nebeud pedennou evid an dñn tremenet

Ha bremañ emañ o vond da echui an noz-veill-mañ, en eur lavared eur bedenn ziweza.

Da genta, litanioù berr hag an oll a responto:

ROIT DEZAN(dezi)AR REPOZ VAD ETERNAL !

Salver Jezuz, c'hwi hag a zo deuet da zigas deom ar vuez...

Salver Jezuz, c'hwi hag ho-peus bet truez ouz ar beherien...

Salver Jezuz, c'hwi hag ho-peus pardonet da Vari-Vadalen...

Salver Jezuz, c'hwi hag ho-peus prometet ar baradoz d'al laer deou, deuet keuz dezañ d'e behejou...

Salver Jezuz, c'hwi hag a zo maro evidom...

Salver Jezuz, c'hwi hag a zo pignet d'an Neñv, da bourchas deom eur plas...

Bremañ, pedennou all d'ar Werhez .

An oll a responto:

GOULENNIT EVITAN ar REPOZ VAD ETERNAL!

Santez Mari, Mamm or Zalver...

Santez Mari, leun a drugarez...

Santez Mari, repu ar beherien...

Santez Mari, frealzourez an dud doaniet...

Santez Mari, Rouanez an Neñvou...

Santez Mari, porz ar Baradoz...

De Profondis

Alies on-eus lavaret an De Profondis, heb intent ar pezh a lavarem.  
Lavarem, hirio, ar bedenn-ze, e brezoneg, goustadig ha gand devosion.

1. AL LENNER: Euz goueled an islong am-eus kriet ouzoh, Aotrou...  
Aotrou, selaouit va fedenn!

2. AN OLL : Troit ho skouarn da zelaou va fedenn  
evel eun Tad da zelaou galv e grouadur.

3. Ma ne zalhit kont nemed euz va fehejou, Aotrou,  
piou a hello herzel ?

4. Med ho levenez eo pardoni,  
Setu perag am-eus fiziañs en ho madelez.

5. Prometet ho-peus or zavetei  
hag ennoh eo e lakan va esperañs.

6. Evel ar gedour o hortoz goulou-deiz;  
evel-se e lakan ennoh va esperañs.

7. Dalhmad e tiskouez an Aotrou e vadelez.  
Dalhmad eo prest da bardoni.

8. An Aotrou eo Salver e bobl;  
dizamma a raio e bobl euz e oll behejou.

9. Aotrou, grit d'hon tud aet da anaon mond d'ho Paradoz dudluz!

10. Ha ra zeuio ho sklerijenn da bara warno da viken.

Ya ,deread eo kana meuleudi deoh,e peb leh hag heb ehan,  
 Aotrou,Tad Santel,Doue Eternel,hag oll halloudeg,  
 dre 'n abeg d'an Aotrou Krist,or Zalver,  
 e-neus lakaet da bara a-us deom,an esperañs euz ar Rezureksion dudluz.

Rak,mar dom doaniet o soñjal er maro o tond heb arvar,  
 ar bromesa eh advevim da viken a zeu da derri on enkrez.

Da fin or buez war an douar ez eus er baradoz  
 ouz or gortoz eun demeurañs peurbaduz.

Setu perag e kanom gand an aelez ho meuleudi hag ho kloar !

Meulet ra vezoh,O Doue,  
 hag ho-peus hadet esperañs en or halonou !  
 D'ar gerent hag a zo doaniet,roit ho nerz ha roit ho joa!

D'an dén trement,roit ar repoz vad peurbaduz;  
 ha grit m'en em gavl'm,oll assemblez,  
 e Baradoz al levez,e leh ne vo mui na daelou na kañvou  
 ha ma skedo enni da viken ar peoh hag an eürusted.

Evel-se bezet graet !

0 0 0 0 0 0

0 0 0 0

0 0

0

## WARDRO AR RE VARO

Embannet on-eus dija pedennou evid an noz-veill. Deuet eo ar mare da guittaad an ti, ar mare da lakaad ar horv-maro en arched, ma n'eo ket bet archedet c'hoaz. Eun dra vad eo oter pedennou.

EPAD M'EMAER OH ARCHEDI AR HORV-MARO

## 1. Pedom!

Aotrou Doue, warzu ennoh e troom on daoulagad d'ar mare ma kimiadom diouz an hini a garem; ne welim mui e zremm.  
Roit dezañ(DEZI)ar hras d'ho kweled eun deiz, c'hwil dirazañ hag en dirazoh.

Lakit ennom an esperañs stard d'e weled endro en ho kichen da viken.

AMEN !

Roit dezañ(DEZI), Aotrou, an diskiñ peurbaduz !

Ha ra skedo dirazañ(DIRAZI)ar Sklerijenn!

## 2. Pe c'hoaz pedennou berr

- Goude m'o-deus e zaoulagad gwelet or re deom-ni!

- GRIT DEZAÑ(dezi), AOTROU, GWELED HO TREMM !

- Goude al levezeg hag ar garantez a zo bet dudi e vuez...

- Goude ar poaniou hag an dailou o-deus beuzet e zaoulagad...

- Goude ar pehed e-neus greet d'e lagad koll e lufr...

- Klasket e-neus ar wirionez a-greiz e galon...

- Kredet e-neus ennoh heb beza morse ho kwelet...

## 3. Pe c'hoaz eul lennadenn verr

a/ Kol 3/3-4

3. C'hwil a zo maro, hag ho puez a zo kuzet, a-unan gand ar Hrist, e Doue.

4. Pa 'zeuio ar Hrist war wel en or buez, neuze, c'hwil ivez a zeuio war wel asamblez gantañ er hloar.

b/ Rom.6/8-9

8. Ma 'z om tremenet dre ar maro gand ar Hrist, e kredom e vevim ivez gantañ.

9. Rag, her gouzoud a reom:

ar Hrist savet a varo da veo ne varv mui;  
ar maro warnañ n'e-neus mui a halloud.

## 4. Pe c'hoaz ar Salm 26

Gweled a reom penaoz intent an disparti; pedet om da veva gand feiz hag esperañs.

diskan: Sklerijenn ha silvidigez  
eo evidom an Aotrou Doue!

1. Va sklerijenn ha va zilvidigez eo an Aotrou,  
rag piou am-bo aon ?

Moger-divenn va vuez eo an Aotrou,  
dirag piou e krenin ?

2. Eun dra am-eus c'hoant braz da gaoud,  
a houlennan digand Doue:  
mond da jom da di an Aotrou Doue,  
epad va oll mazer.  
Eun drugar e vo din peoh an Aotrou Doue  
hag eun dudi gweled e zantual.

7. Selaouit, Aotrou Doue!  
A-bouez penn ho kalvan.  
Kemerit truez ouzin ha respontit din.

8a. Ouzoh e komz va halon, c'hwil eo a glaskan.  
Gweled ho tremm a glaskan, na guzit ket ouzin.

13. Sur on e welin madelez Doue e bro ar re vep!

14. Gortoz an Aotrou gand fiziañs, bez dispont ha kaloneg,  
gortoz an Aotrou Doue!

### O KUITAAD AN TI

Awechou e vo eur beleg war al leh. Awechou all ne vo ket. N'eus forz penaoz, eo red merka ar himiad-se gand pedennou, dreist-oll ma ne vez ket bet a noz-veill.

Poaniuz eo ar mare-mañ evid ar gerent. Eul laik a hell ren ar pedennou. Danvez awalh a vo kavet: lennadennou, salmoù, litanioù...

Ar beleg a lavaro eur gomz bennag a frealzidigez hag a gonfort d'ar gerent, a raio sin ar groaz war an arched pe a strinko dour benniget warnañ.

Goude-ze, eur gerig evid entana ar feiz hag an esperañs, diwar pennad pe bennad euz ar Skritur-Zakr, evel ar re-mañ.

Maze 11/28

Deuit davedon,  
c'hwil oll a zo skuiz hag a bleg dindan ho samm  
ha me a roio deoh an diskuiz.

11 Kor. 5/1

Her gouzoud a reom,  
ma teu on demeurañs war an douar da veza diskaret,  
on-eus en Neñvou eun ti savet gand Doue,  
ha n'eo ket diwar zorn an dén,  
eun demeurañs peurbaduz.

Eur bedenn asamblez

pe

eur bedenn-letani, eun dra bennag evelhenn:

Gwasket ha doaniet or halonou, ho pedom, Aotrou Doue, da Jom ganeom!

R/ CHOMIT GANEOM, AOTROU !

- Mister braz ar maro a zo dirag on daoulagad,  
n'on dilezit ket, Aotrou, ni ho ped...
- Er mare-mañ a gañv hag a zisparti poaniuz, ni ho péd, Aotrou ...
- D'an eur-mañ ma 'z om gwasket gand ar boan, an anken, an aon,  
ni ho péd, Aotrou...
- Evid ma chomo beo en or halon ar zoñj euz N... gand an esperañs d'en  
em gavoud asamblez en ho kichen, ni ho péd, Aotrou...

pe

eur Salm. Lakom ar Salm 22.

Kuitaad an ti evid mond d'an iliz a zo eur skeudenn euz ar himiad a vo  
on hini pa 'z aim euz ar béd-mañ d'an iliz a zo en Neñv.  
Fiziañs on -eus da vond da Di on Tad o houzoud e-neus eno ar Frist mi-  
ret deom eur plas.

dsikan : Doue eo va fastor;  
ne vanko din netra.  
Rag war ar peuri druz  
am has da ziskuiza.

(Breiz a gan E°3 p.36)

1. An Aotrou eo va fastor,  
n'am-eus diouer a netra.
2. War ar prajou geot tener e ra din gourvez;  
daved doureier an diskuiz e kas ahanon.
- 3a Ha nerz fresk a ro d'am ene.
- 3b Va heñcha a ra dre ar gwenojennou surra,  
evid enor e ano.
4. Ha pa rankfen kerzed dre stankenn an Ankou,  
n'am-eus aon rag droug ebéd,  
rag c'hwil 'zo ganin.  
Ho penn-baz hag ho kwalenn am laka dineh.
5. Evidon e lakit an daol, dirag sellou va enebourien;  
an eoul c'hwéz-vad a skuillit war va fenn,  
ha va halir a zo leun barr.
6. Eürusted, gand ho madelez,  
a vo va lod, bemdez 'hed va buez;  
dicemer a gavin e ti an Aotrou, epad hir amzer.

pedennou

1. Salver Jezuz,  
c'hoant ho-peus kemered ganeoh  
ar re a zo bet roet deoh gand ho Tad.  
Plijet ganeoh rén beteg e zemeurañs peurbaduz  
or muia-karet N...

ema o kuitaad an ti e-neus bevet ennañ,  
roit digemer dezañ e-touez ar re ho-peus galvet  
da-veva en ho kichen.

Ha ni hag a jom war an douar,  
roit deom nerz-kalon da blijoud atao muijoh deoh,  
C'hwi hag a zo beo gand an Tad hag ar Spered Santel, da viken.

pe

## 2. Aotrou Doue

N...a zo bremañ o kuitad e zemeurañs er bed-mañ;  
lezel a ra war e lerc'h e dud glaharet;  
grit deom mired ar zoñj anezañ,  
n'eo ket avad, gand ar c'hwervoni da veza e gollet,  
n'eo ket avad agnd keuz dezañ ha netra ken.  
Med gand an esperañs euz ar Rouantelez,  
el leh ma vezim bodet asamblez ganeoh.  
Dre Jezuz Krist, Or Zalver.

ARAOG AN DIBLAS

Ra blijo gand Doue,  
Sklerijenn evid ar re a ya d'ar bed all,  
or ren war hent ar peoh !

FUS AN TI D'AN ILIZ

Derhel kont euz boazamant ar vro.  
Gelloud a hellfed kana salmou, evel ar re amañ warlerh  
gand so antivenennou.

SALM 114-115 1-2,3-4,5-6,8-9 10,15,16-17,18-19

Antivonenn:|Me 'blijjo din beva dirag sellou Doue,  
e bro ar re veo,bremañ ha da viken.

2Me a gerzo dirag Doue,  
e bro ar re veo.

✦ ✦ ✦

1. Febez karantez am-eus bet evid an Aotrou Doue,  
rag selaouet e-neus mouez va fedenn.
2. Ya, troet e-neus e skouarn warzu ennon,  
en deiz ma halven anezañ d'am zikour.
3. Luiet e oan e lasou an Ankou, paket e rouejou bro ar re  
beuzet gand glahar hag enkrez, varo,
4. P'am-eus galvet an Aotrou da zavetei va buez.

5. Madelezuz eo an Aotrou, ha just eo ivez;  
ya, on Doue a oar truezi.
6. Divennour ar re vianig eo an Aotrou;  
pa oan koezet dinerz, e-neus va zaveteet.
8. Diwallet e-neus va buez euz ar maro,  
va daoulagad euz an daelou, ha va z Reid euz al lamm.
9. Ober a rin hent c'hoaz dirag sellou an Aotrou,  
war zouar an dud veo.

## SALM 115

10. Fiziañs am-eus bet atao, ha pa lavaren: Gwall reuzeudig on!
15. Tenn eo d'an Aotrou gweled e vignoned o vervel.
16. Me ho ped, Aotrou ! Ho servicher on-me ivez,  
ho servicher ha mab d'ho servicherez,  
ho torret ho-peus va liammou.
17. Eur zakrifis ez an da ginnig deoh,  
ha meuleudi a ganin da ano an Aotrou.
18. Ar provou am-eus touet a ginnigin d'an Aotrou,  
ya! Dirag e bobl a-bez,
19. e leuriou ti an Aotrou, e-kreiz e Gêr Zantel.

+++++

## SALM 120

1-2, 3-4, 5-6, 7, 8

Antivonenn: Me a laka va fiziañs  
e Doue, Mestr ar Bed.

1. Sevel a ran va daoulagad etrezeg ar menezioù.  
Euz a beleh eta e teuo sikour din.
2. Ar zikour a zeuo din digand Doue,  
e-neus grêt an neñv hag an douar.
3. Ne lezo ket da droad da strabot,   
ne gousko ket an hini a ziwall ahanout.
4. Nann, na mori, na kousked,  
ne raio an Hini a ziwall Israel.
5. An Aotrou a zo mirer dit,  
An Aotrou gwaskeder dit, bepred en tu deou.
6. War an deiz, ne skoio ket war an heol,  
nag al loar en noz.
7. Da vired a raio, an Aotrou, a beb droug,  
beilla a ray war da vuez.
8. An Aotrou a viro ahanout pa vi o vond, pa vi o tond,  
bremañ ha da viken.

+++++

## SALM 121

1-2, 3-4a, 8-9

Antivonenn: Kaer ha plijuz meurbed  
eo beva asamblez.

1. Stad a oa ennon pa 'z eus bet lavaret din;  
- Deom da Di an Aotrou Doue !
2. Ha setu-ni chomet a-zav  
dirag da zoriou,Jeruzalem !
3. Jeruzalem,savet evel eur Gêr,  
unanet start enni an tiez,  
di e pign ar meuriadou,
- 4a. Meuriadou an Aotrou Doue.
8. Dre garantez evid va breudeur,va mignoned,  
e houlennom evidout ar peoh.
9. Dre garantez evid Ti an Aotrou,on Doue,  
e houlennom evidout levez.

+++++

SALM 125

1-2ab,2cd-3,4-5,6

Antivonenn : Mond ha dond a reont en eur ouela.  
Dond a reont endro en eur dridal.

1. P'e-neus an Aotrou digaset d'ar gêr tud divroet Sion,  
e oa evidom evel eun huñvre.
- 2ab.C'hoarz laouen ganeom leiz or ginou,ha kan war or muzellou.
- 2cd.Neuze e lavare tud ar broiou payan:  
- Ken kaer traou e-neus greet an Aotrou evito!
3. Ya,ken kaer traou e-noa grêt an Aotrou evidom,  
hag edom e barr al levez.
4. Digasit d'ar gêr,Aotrou,on tud prizoniet,  
evel froudou dour en dezert.
5. Ar re a hade en eur skuill daelou,a ray an eost en eur gana.
6. Mond ha dond a reont en eur ouela,pa daolent had en douar;  
dond a reont en-dro en eur dridal laouen,  
pa zougont o drammou-ed a-vriadou.

+++++

+++++

++++

+